

**Abalor (Leon ar Berr)** (Erge-Vihan 1874 – Roazon 1946

**Sinatur an eil Testamant** : Kenta priz Kevredigez Broaduz Breiz. 1910. Bet embannet e 1911.

Pez-c'hoari en eun arvest.

Modernaet eo bet an doare-skriva.

Anad eo e ouie Abalor kalz gwelloh ar galleg eged ar brezoneg. Stummou galleg a zo e-barz e skrid. Ouspenn ez eus faziou kemmaduriou.

### **Ar hoarerien**

Kont Alan a Landelo, eil-ofiser chaseourien dimeuz An Afrik, 25 bloaz.

Lom Lazbleiz, mevel koz, 80 vloaz, hag ouspenn.

Mona, enebarez, 22 vloaz.

Perig, ar paotr-saout, 10 vloaz.

# Kevrenn I

**Lom**

*(E-unan o tond a-gleiz, eu letern en e zorn).*

Piou a zegouez eta d'an eur-mañ ? N'eo ket c'hoaz goulou-deiz ! Ha neuze ne dleer ket son evel-se ! N'eo ket niz ar markiz eo (Doue da bardonañ an Anaon !), rag hemañ ne erruo nemed warhoaz. Dihuna ray an oll ! *(Mond a ra kuit eur pennadig dre an traoñ, hag eun nebeud goude eh en em ziskouez a-nevez, en eur zevel e letern da sklêrijenan Alan).*

# Kevrenn II

Lom, ar hont Alan

**Alan**

A-benn ar fin, setu aze eun dremm ! Neuze, setu ar maner Landelo dirag va daoulagad ?

**Lom**

Ya, aotrou, hemañ eo !

**Alan**

*(gleb e zillad a hij anezo)*

Pez amzer spontuz ! Peseurt beaj kavet gand an diaoul ? Red eo kaoud nerz kalon, evid treuzi, en noz, ho tezerchou ! Morse n'am-eus gwelet eur vro heñvel ouz Breiz-Izel, pep hent ho kas d'eul lagenn bennag ! Ouspenn ugent gwech eo bet tost din chom er vouillenn ; lavaret eo ar vro-ze, an hini a zo dindan skoazell an drouiz Marzin, ha ken karet gand an doueez Viviana ! D'an diaoul braz Breiz-Izel, ha foei war he hentchou. Erfin *(en eur azeza)* degouezet on ! n'eus forz penaoz ! ouf !

**Lom**

C'hwi, aotrou, eo eta mestr ar maner !

**Alan**

Me, va-unan ! Lan a Landelo, niz ar markiz *(en eur zelled en-dro dezañ)*. Hennez eo ar maner ! N'eo ket brao a ouzoud.

**Lom**

N'eo ket c'hoaz renket mad an tarou en e ziabarz ! N'oam ket war-hed aqhanoh, a-raog warhoaz !

**Alan**

Ya... me 'oar... Mez, hast am-boa da weled va ferhenniaj, va heredigez, rag evid doare, on e gwirionez an her. P'am-eus degemeret lizer an ali, 'oan en Afrik, hag em-eus ranket goulenn eur hoñje ! *(en eur zelled eur wech all en-dro dezañ)*. N'eo mad nemed evid beza diskaret, ar hoz kêrig-se !

**Lom**

*(souezet)*

Eur hoz ti ar maner-ze ? O !

**Alan**

Petra o ! Ha kredi a rez e hell beza lakaet ern gwerz ?

**Lom**

En gwerz ? Maner koz Landelo ! N'eo ket posubl ! D'an hini a baeo ar muia ? Na, kement-se a ve eur gwall darvoud ? O ! mil diaoul ! Daonet 'vo krohenn va ene ! (*Lakaad a ra eur brizenn hag a ra kalz trouz o streviad*). Goude toud, en ho kalloud ema ober ar pezh a geroh euz ho maner !

**Alan**

E ! Tankerruz ! Ta ! E werza a hellan. Den ne gredfe soñjal ar hontrol !

**Lom**

(*outañ e-unan*)

N'eo ket heñvel ouz an aotrou markiz eet d'an Anaon ! (Doue d'e bardono !). Setu aze unan hag a oa eun den mad !

**Alan**

Red eo dihuni tud ar maner !

**Lom**

N'en-deus ket an êr da veza droug,mez ne anavez ket ar Vretoned. Morse 'n-eus komzet ouzin ken rust ! (*d'ar hont*). Tud ar maner ! Peseurt tud, aotrou !

**Alan**

Penaos ? Ar vevelien, na petra 'ta !

**Lom**

Nemedon me...

**Alan**

Da-unan emhout ?

**Lom**

Daou all 'zo c'hoaz... Tual ar jardiner, ha Perig ar paotr-saout.

**Alan**

Ra vezo dihunet ar jardiner !

**Lom**

Da betra ? Ne dalv ket ar boan !

**Alan**

Arsa ! rezoni a rez ?

**Lom**

Ya ! komz a ran rezon ! Adkousked rafe, rag ne ra nemed kousked.Setu penaos ema.

**Alan**

Ha te ?

**Lom**

O me ! ne gouskan mui abaoe m'eo maro ar Markiz ! Doue d'e bardono ! Kalz e garen ! Bez' e oam evel pa lavarjed daou vignon. « Va Lom kêz, a lavare din, evel-se... pa...

**Alan**

*(e galon tenerraet hag o vired outañ da lavared muioh)*

Pesurt ano 'teus ?

**Lom**

Lom, pe kentoh Gwillom Lazbleiz , deuz Kervoualh, e Lanrien. Oajet on a bevar-ugent vloaz. Paket am-eus Abd-el-Kader e kompagnunez mab Loeiz Fulup, ha bet on e Kamp-Koñli er bloavez 1870, gand an aotrou markiz. Kement tra-mañ a bouez evid eun dra bennag !

**Alan**

Gweled a ran ez out eur gwaz mad euz ar re gosa. Neuze 'ta, va Lom kêz, evid komz evel va yontr maro (ra vezo e ene da Zoue !, evid komz evel ma rez da-unan !). Mervel a ran gand an naon ! Hag eun tamm bennag a zo, da vihanna, evid lakaad etre va dent ?

**Lom**

Eun dra bennag da zebri ? Evid an dra-ze ne vank ket ! Beza deuz or buoh, lêz... Beza deuz amann...

**Alan**

*(oh ober goap)*

Beza deuz ho puoh... bara, n'eo ket 'ta, va bonomig ! *(en eur vond ouz taol hag oh azeza)*. Deom ! e Breiz-Izel evel en Breiz-Izel !

**Lom**

Diohte, aotrou *(mond a ra er zal hag e tegas war an daol eur pladad amann, eur podad lêz hag eun dorz vara)*

**Alan**

Ro din eur gontell !

**Lom**

An aotrou n'en-deus kontell 'bed.

**Alan**

'M-eus ket, 'vad !

**Lom**

Me 'bresto va hini d'an aotrou *(digeri a ra e gontell ; he zerr a ra war e vreh hag e kinnig anezi d'ar hont)*.

**Alan**

*(o c'hoarzin)*

Bon ! Trugarekaad it ! (*kemered a ra ar bara*). An dra-ze n'eo ket bara eo ? Ha sur out n'eo ket eun tamm mên-meill<sup>1</sup> (*Klask a ra debri eun tamm*). Muioh e stourm ouz an dent eged na stourmas Smala And-el-Kader, 'eneb d'an duk d'Aumal !

**Lom**

Eun tammig eo kaled ! gwir eo !

**Alan**

E gwirionez, n'on ket evitañ !

**Lom**

Gweled a ran n'oh ket kontant, aotrou yaouank !

**Alan**

Bast ! Pa vezer soudard, dao eo senti dioh pep tra, dreist-oll pa vezer sous-ofiser !

**Lom**

Eur sous-ofiser ? C'hwi hag a zo eur hont evel ma lavarer en noblañs, e tlefeh beza kapiten d'an nebeuta.

**Alan**

Me hag a anver aotrou kont, hir evel va breh, a zo maréchal-des-logis er rujumant chaseourien an Afrik.

**Lom**

Uhelloh eun tammig eged eur greunader evel m'oen bet va-unan, en amzer an tad Bugeaud.

**Alan**

Petra 'fell dit ? Mestr war va danvez d'an oad a ugent vloaz, on bet eur gwir vab prodig. Abenn tri bloaz am-oa dispignet kement gwenneg am-boa, ha ne ouien petra da ober deuz va nerz, pa deuas soñj din am-boa, er penn pella euz a Vreiz, eur yontr d'am zad, eur yontr-braz din, eur Breizad koz, ha n'em-oa gwelet morse. Evid ar wech kenta, e teuan e bro an diaoul-mañ !

**Lom**

Ar yontr koz-se deoh, 'oa va mestr, a zo maro ! Doue d'e bardono !

**Alan**

*(Troha a ra eun tamm bara hag en em lak da zebri)*

Evel a larez ! N'on-deus bet anaoudegez an eil euz egile nemed dre liziri. Skriva 'reen dezañ evid goulenn digantañ arhant hag e respontas din e tlee va disherita. « Disherita a rin ahanout », a lavare, eur wech an amzer. E-pad e vuhez, n'en-deus komzet din, nemed euz disherita (*en eur droha e gomz en eur weled Lom, oh eva al lêz*). E ! Mad ez a ganez, muioh evidon a nerz kalon az-teus !

**Lom**

Al lêz ne dalv ket ar chistr, mez al lêz-mañ a zo deuz va buoh !

---

<sup>1</sup> meill : milin.

**Alan**

Hogen, komzom a-nevez euz ar yontr ! Ar pezh a skoe muia gand va daoulagad 'oa e zinatour ken nobl ! (*oh ober ar jestr evel sina*). Eul linenn vraz kamm-digamm, evel eul luhadenn ! Pa oa treud ar yalh e welen ar zinatour dre huñvre, ha bremañ eh implijan anezi : vlañ ! LANDELO, (*hag e ra jestr ar zinatour*). Diaoul a zinatour ! Setu eun devez va yontr da skriva din 'oa addimezet hag e roe din evel-se eur voereb ! O ! evid an taol-ze e skriven dezañ va lizer diweza :

« Va yontr bihan karet, eun den hag a zo evid al lealded e-keñver ar rouantelez ne dlefe ket nozoud d'eur gwir heritour ! » Hag an dra-ze 'oa evid rei dezañ da intent e oa re goz pa zimeze (*cheñch a ra mouez*). Daonet e vin ! Sakerdie ! Malloz ma btun !

**Lom**

(*leun e veg*)

Peseurt kelienenn a beg ennoh ?

**Alan**

Mez dao eo din mond da weled ma moereb ?

**Lom**

An itron markizez ? N'ema ket mui amañ !

**Alan**

N'ema ket mui amañ ?

**Lom**

C'hweh miz 'zo, pa varvas ma mestr, e kuitaas eur maner ha ne oa ket dezi, evid mond da chom war ar mêz, en eun ti tost amañ.

**Alan**

A ! e giwrionez ! Domaj eo ! Mankoud a ra d'an ti ! Ar gêr 'zo kalz tristoh, dre n'ema ket e-barz.

**Lom**

Heñ ? Perag ?

**Alan**

(*heb respont*)

Arsa ! gwelom bremañ, peogwir am-eus debret va fred e mod Breiz, ha moaienn 'zo da renoz eun nebeud. A ! eur ger c'hoaz ! N'ouzout ket mad ar galleg, Lom ?

**Lom**

E giwrionez, ne gomzer ket ar yez-se amañ. Ar markiz 'zo maro (Doue d'e bardono !) a gomze din brezoneg hag ober a ree memez gwerziou meuleudiu evid an eureujou hag ar charreou.

**Alan**

Ma chomez ganen, e vezo red dit boaza da gomz e galleg, abalamour d'am hamaladed, ha zoken din va-unan, rag ne gomzan brezoneg nemed gand poan. Eur ger bennag, hepken, am-eus desket gwechall, e skolaj Sant Charlez...

**Lom**

*(outañ e-unan)*

Hemañ n'eo ket eur Breizad evel e yontr maro ! Ra vezo e ene da Eoue !

**Alan**

Gwelom ha kousked a heller e-pad eun nebeudig amzer ed-barz va hasetll.

**Lom**

Ma kar an aotrou mond er gambr 'zo e-kichenn (*digeri a ra an nor*), ar gambr-se eo hini an aotrou markiz.

**Alan**

*(o selled dre an nor digor)*

Hini va yontr ? Skorna a dleer er gambr-se. An deiz a houlaouo ne vo ket pell. Eun eurvez renoz er gador-vreh-mañ, a vo a-walh. Nozvez vad !

*(Ober a ra sin gand e zorn d'ar mevel da vond kuit, ha ker pront e halv anezañ).* A ! Kleo 'ta !

**Lom**

Aotrou ?

**Alan**

Kemenn d'eun noter bennag lakaad ar hoz ti-ze e gwerz : n'eus forz peseurt priz. Kasom an traou koz da netra. Kompren a rez ? (*en eur skoi war e gov*). Bedouin koz ?

**Lom**

*(en eur zistroi)*

Ne garan ket an ardou-ze ! Ar markiz hag a oa ker mad... Sur on n'eo ket kontant mar 'ma dre amañ oh ober e binijenn.

## **Kevrenn III**

**Alan**

*(e-unan)*

Setu-me heritour d'an oll danvez ! Nag e vezo cheñchet ar maner-kêz-se en eur zal aour lugernuz, hag en nebeud amzer c'hoaz ; (*ober a ra mouez ar gwerzer*) Deredit oll ! Eur maner koz, warnañ daou dour briz, lakaet e gwerz evid ugent mil lur ! Pemp mil lur warn-ugent ! Alo, tregont ! Taolit atao ! Muioh ? muioh c'hoaz ? Ar gêrig-se a zo euz an amzer-greiz ! Talvezoud a ra he fouez arhant ! Pemp mil ha tregont ! Brao ! Daou-ugent ! Tri-ugent ? Tri-ugent, eur wech Tri-ugent, diou wech ! Tri-ugent, diou wech hanter ! Teir gwech ! Gwerzet. (*Skoi a ra gand an daol, e zorn e-giz eur morzol, en eur floura e varo*). Tri-ugent mil lur ! Eur somm brao ! ! Lavaret eo... Paea a rin friko braz da oll dud ar skoadron. Alo 'ta... mignoned... Evid... karit... dañsom ar jabadao... Mez da beleh ez a va spered ? N'emaom ket eno c'hoaz... Da hortoz an amzer eüruz-se, klaskom kousked eun eurvez pe ziou, hag e teuy an noter direbech am-eus lakaet goulenn. Evid kousked, e karjen lenn eun dra bennag... (*kemer a ra eul leor war an daol*). Barzaz Taldir... petra eo an dra-ze ? Brezoneg ? A !... nag e ve gwelloc'h ganen eun dra bennag evel Les Gaietais de l'Escadron. (*En em lakad a ra da gana*) :

Caroline... Caroline, etc.

*(En eur zelled ouz al leor).* Gweled a reer ennañ, penaoz Douar Breiz a houlenn e vugale. Ouspenn-ze, ar barz a bretant e teu an den, en despet dezañ pa zon eur spered an Tadou koz, da veza divenner kaloneg ar vroig, pa vezer troet d'hen ober, pe ne verzer ket...

**Alan**

Korn butun ! Ne fell ket din poulza va gwriziou amañ hag an oll varzed euz ar bed ne virint ket ouzin da redeg bro dindan oabl an Afrik, evel ar gwella chaseour aljerian.

## **Kevrenn IV**

**Alan, Mona**

**Mona**

*(en eur gredi 'oa he-unan).*

Kenavo, mogeriou koz, a welan evid ar wech diweza ! A-raog lavared, e-harz an aoter, geriou ha na hellint ket beza torret, am-eus c'hoantaet kemered ho skeudenn hag he skriva don em halon ?

**Alan**

*(a zell)*

Sell ! eur vaouez ! hag unan goant, va feiz !

**Mona**

*(Outi he-unan)*

Unan bennag amañ ! Gwerhez Kerzeot ! *(da Alan, e galleg).* Oh ! monsieur, veuillez m'excuser !

**Alan**

*(o sevel)*

C'est plutôt à moi, Madame, de vous prier de me pardonner, si je ne vous ai point vue entrer, dès l'abord...

**Mona**

Non ! je suis confuse de mon indiscretion *(en eur stoui dirag Alan).* Adieu, monsieur !

**Alan**

*(en eur ober memez tra)*

Madame ! *(Mona a ya dre an traoñ).*

## **Kevrenn V**

**Alan, Lom**

**Alan**

Petra din-me ? daoust hag eur spes koant bennag en em ziskouez er hoz ti-mañ ? Va haso an diaoul gantañ ! Bez' e tlejen beza he dalhet mad ! Eet eo aze ! Mar gelljen gweled... *(Tostaad a ra ouz an nor).*



**Lom**

*(oh en em stoka outañ)*

Va digarezit, aotrou yaouank ! Kaset am-eus ar paotr-saout da di an noter Lagadeg hag am-eus lavaret dezañ distrei war-dro ar hreisteiz. Evelkent, aotrou Landelo, n'eo ket mad gwerza ar maner evel-se !

**Alan**

Bon ! Bon ! Mez lavar din, piou eo ar plah yaouank-se am-eus gwelet aze bremaig ?

**Lom**

Eur plah yaouank ?

**Alan**

Koant ! Deuet eo amañ !

**Lom**

Mez, n'eus plah yaouank ebed amañ. Gortozit ! Gortozit ! *(eun nebeudig goude)*. Gortozit 'ta ! Daoust hag ar varkizez eo ?

**Alan**

Merh a, hini koz ?

**Lom**

Peseurt hini koz ?

**Alan**

Malloz ma butun ! Markizez koz Landelo !

**Lom**

Mez n'eus amañ markizez koz ebed !

**Alan**

Penaos ?

**Lom**

Hi 'o ar varkizez he-unan.

**Alan**

Ha bast !

**Lom**

Intañvez an aotrou markiz ?

**Alan**

Va moereb koz ! *(droug ennañ)*. A ! mez, lavar 'ta Lom goz...

**Lom**

Mez pa lavaran deoh eo hi ho moereb koz !

**Alan**

*(o c'hoarzin)*

Va moereb koz ? Va yontr en-deus roet din eur voereb euz an oad-ze ? Mez ne ouzout ket am-eus he havet koant-braz ?

**Lom**

Koant . A ! me 'gred, sur ! ha mad ha karantezuz... da lavared eo n'eus ket e Kerne, nag e Leon, a-leiz, eun all hag a ve par dezi !

**Alan**

Gweled a reer e karez anezi kalz.

**Lom**

Hag he haran... Eur gwir bennoz a-berz an aotrou Doue, eo an itron-ze. Degemeret he-deus merh ma nizez hag a oa chomet he-unan, e Pont-Loaket, goude maro he mamm. He maget he-deus hag he skoliet. Ker-mad eo !

**Alan**

Paour-kêz bihan ! Ya, red eo din he adgwelet. Petra 'zoñj ahanon ? Deuet eo hag eet kuit ker buan ! Lavar dezi ema ar hont Alan a Landelo o vond da renti dezi e zeveriou.

**Lom**

Mad, aotrou ! *(outañ e-unan)*. N'eo mui ken du e lagad ! *(mond a ra kuit)*.

## **Kevrenn VI**

**Alan**

*(e-unan)*

Petra ? Honnez a vije ma meoreb koz... mez yaouank, yaouank am-eus kavet anezi ! Nag eo eun dra souezuz ! kaoud eur voereb koz euz an oad-ze ? Nag hi 'zo koant ha leun a vraventez ! Eun taol lagad mad en-doa an daonet tonton koz ! Doue d'e bardono !

## **Kevrenn VII**

**Alan, Mona, Lom**

**Lom**

*(o tond gand Mona)*

Ya ! Itron, hennez eo niz an aotrou markiz, e heritour, a ouzoh.

**Alan**

*(e galleg)*

Je suis confus, maadme, de m'être aisni introduit chez vous. Mon excuse est que j'ignorais entièrement...

**Mona**

*(o c'hoarzin)*

Ne vous excusez pas, Monsieur. Tout malentendu eût été évité, si j'avais pensé à me présenter moi-même (*goude eun nebeudig amzer hag e brezoneg*). Mez, aotrou, Lom en-deus lavaret din eh ouzoh ar brezoneg. Komzom 'ta e brezoneg, peogwir eo yez ar Vro. Ya, c'hoant am-boa da weled evid ar wech diweza, ar maner-ze...

**Alan**

(*tregaset*)

Ar maner... A ! ya ! mez 'pad ar goañv e tle beza trist-meurbed !

**Mona**

(*buan*)

Morse n'on bet eürusoh em buhez. Tremenet am-eus amañ tri bloaz el laouenedigez ar vrasa. Hag al laouenidigez a zlean d'an aotrou markiz. Ra vezo e ene da Zoue ! Dalhet en-deus d'ar ger en-doa roet d'am zad gand heveleb teneridigez. Deuet e oan da veza e verh. O ! an nozveziou hir euz ar goañv, tremenet e-kichenn an oaled ledan-ze. Me a laboure broderez, eñ a gentelie d'ar vugale euz ar gêr ar brezoneg karet-se, komzet gand ar Vreiziz, yez hag a ouie ken reiz, hag en-doa eviti kement a garantez, ma ne veze klevet morse amañ eur ger galleg !

**Lom**

A ! ya ! eñ a oa eur gwir denjentil euz or bro, ha nann euz al lakizien-ze kouezet dioh lost ar harr, hag o-deus moustret on tadou !

**Mona**

Allaz ! an amzer eüruz-se ne zistroio mui ! (*en eur cheñch mouez*). Mez gweled a ran, va Lom paour, eo poent aoza kement tra evid mond kuit.

**Alan**

Petra ? mond da beleh ?

**Lom**

Ya, itron markizez, c'hwi 'vezo er gouent-se, a-raog an overennn eiz eur. N'eo ket bremañ osepenn pemp eur !

**Alan**

D'ar gouent ! (*da Vona*). Malloz ruz !... O ! va digarezit, mez mil diaoul ! c'hoant hoh-eus da vond d'eur gouent ?

**Mona**

Ya, aotrou kont ! N'am-eus mui a diegez ! Ar re a stage va halon ouz an douar-mañ, a zo maro ha ne zistroint ken, hag el leh am-eus choazet, e kavin a-neve ar peoh hag an evurusted.

**Alan**

(*teñvallaet*)

Ya... just eo, sur a-walh !

**Mona**

Lom, e peleh e tle ar wetur dond evid va hemered ?

**Lom**

Amañ, itron markizez !

**Mona**

Mad eo ! Va gelver a ri, n'eo ket 'ta ! (*Da Alan*). Aotrou, ho-pet ar vadelez da reseo va himiad.

**Alan**

(*en eur ober eur stou dirazi*)

Itron markizez !

**Mona**

(*da Lom a glask mond war he lerh*)

Chom, va Lom koz, e-kichenn an aotrou, e hallez ober vad dezañ. (*mond a ra kuit*).

## Kevrenn VIII

**Alan, Lom**

**Alan**

Tosta eun nebeud ha respont...

**Lom**

(*e benn teñval*)

Morse n'eus bet komzet din er giz-se...

**Alan**

Ar wreg yaouank-mañ, neuze... hini va yontr ! Evid ober an dimezi-ze, penaoz zo bet greet ?

**Lom**

Klevit, aotrou ! Evid doare an dimezell Mona a zo merh d'eur hompagnon-soudard deom, hag a zavetaas e vuhez d'ar Markiz, pa oam trehet er Mans, e-leh ne oan ket en e gichenn.

**Alan**

A ! ya ! ar stourmad spontuz-se ! Va yontr kaloneg a yee war-eeun d'an tan... ra'z in gand an diaoul ! En or gwad eo...

**Lom**

Ha neuze, pa deuas Mona da veza emzivadez, ar Markiz he hemeras en e vaner.

**Alan**

Hag e tlee he hared, n'eo ket gwir ?

**Lom**

Me 'gred, sur... Heh adori a ree. Hi a oa evid an ti evel eur bann-heol o para. Hag evel-se eur mintinvez, ar Markiz en-deus he hemered da bried.

**Alan**

Evid lezel ganti e zanvez... Setu ar pezh a zoñjen... Mezh neuze, abalamour da betra on-me heritour gand karg da rei d'an intañvez yaouank-se pevar mil lur leve, e-pad he beo<sup>2</sup> ?

**Lom**

O ! en despet deom eo, a ouzoh.

**Alan**

Te 'zo jentil ! te 'lavar an traou war-eeun...

**Lom**

Ya, aotrou ! pa lavaran *en despet deom*, n'eus ket meneg deuz Mona, deuz an dimezell Mona, am-eus c'hoant da lavared, iskuzit... e Kerne, ne gomzer ket aliez deuz aotrou nag itron, hag e karer koulskoude ar vistri. Evid neuze, va mestr eet d'an anaon (e ene 'vo da Zoue), o weled e eur diweza o tond, a skrivas evel pa lavarit, eun testamant, mez a-raog e zina e kouezas seizet. Neuze buan e oe galvet an noter.

**Alan**

Ahanta !

**Lom**

Mona, va iskuzit, aotrou yaouank... an itron markizez en-deus harzet an noter da vond er gambr. A briz ebed ne bermetas tostaad outañ. Hag evel ma'h aspeded anezi da ober sina eur paper, ha na dalvje netra hep sinatur, he-deus tapet ar paper, hag hen taolet en tan !

**Alan**

Penaoz ? greet he-deus an dra-ze ?

**Lom**

Mez me 'oa eno... me ! Hag e peden kement Sant Weltaz benniget, ma...

**Alan**

*(o troha dezañ e gomz)*

Lavared a rez...

**Lom**

*(o varhata)*

Me ! Netra ! Da lavared eo ... *(nehet)*, me 'garfe goulenn diganeoh eun dra bennag, aotrou ?

**Alan**

Komz...

**Lom**

An itron markizez en eur vond kuit ahann, a vije bet plijadur ganti, kaoud poltred ma mestr maro. Peoh d'e ene ! Neuze, am-eus soñjet... Ma ne werzot ket anezañ re ger...

**Alan**

Penaoz ? *(kounnaret)*. Eur hlaoustr eo ? Arsa... Tankerru... hag ober a rez goap ahanom ?

---

<sup>2</sup> e-pad he beo : brezoneg iskiz : e-pad ma vo beo.

**Lom**

Va Doue... c’hwi ‘hel evel a lavarjed, refuz. Ho tra eo !

**Alan**

Evid piou e kemerez ahanon amañ ? Hag eur bleiz garo on, eur hoz fripon eru hraver koz re stag e grohenn ouz e gein, eur gwrier arhant ! Mez mil malloz ruz... Hga heñvel on ouz eul laer ?

**Lom**

Ar pezh am-eus lavaret, n’eo ket evid ho facha...

**Alan**

Gwerza eur poltred ? Mez e ginnig a ran, a-greiz va halon, d’an itron markizez...

**Lom**

Ma’z eo posubl ? Ho trugarekaad a ran, aotrou, evid va mestrez. Nag eüruz e vo ! Me hag a grede ez oah eun den fall... C’hwi ‘zo mad... C’hwi ‘zo eun denjentil a-zoare...

**Alan**

Daoust ha kredi ‘rez on eur gwall den ?

**Lom**

Nann ! eun tamm re e tennit d’ar Barizianed. Mez anaoud a reer mad eo ho tud koz deuz an tu-mañ, ha c’hwi a deui da veza heñvel outo, aotrou Landelo, en degemer a reoh d’an dud a renk izel. Gweled a rit, ni etrezom, Bretoned, ne ouzom ket delher on teod dirag ar vistri evel mevelien pe larbined ar hêriou braz ; mez etre ar vistri ha ni eo d’ar vuhez ha d’ar maro ! Beb mintin, an aotrou markiz a roe din e zorn, ha d’an noz ivez. Kredi a ran stard, n’eus ket disparti ebed etrezom e-pad ar vuhez.

**Lom**

*(tenerraet)*

Ahanta ! Va Lom koz, ro din da zorn ha bezom mignoned *(outañ e-unan)*. Diaoul ! mevelien Vreiz n’o-deus ket kalonou evel larbined Pariz ! *(Da Lom)* Mez gwelom ar poltred-se euz va yontr. E peleh ema ?

**Lom**

Aze, en e gambr.

**Alan**

O ! me ‘gred eur... lavaret e ve ema o vond da gomz.

Feiz din-me ! n’am-eus ket a hoant e komzfe din ! Va disherita ‘rafe... Mez kontant e ven da weled ar yontr mad-ze, rag n’am-eus morse e welet. Gortoz ahanon... Distroi a ran. *(mond a ra er-mêz, a-zehou)*.

## **Kevrenn IX**

**Lom**

*(e-unan da genta, ha goude gand Mona)*

**Lom**

N'en-deus morse e welet hag eo heritour... Setu eun dra drol koulskoude (*o weled Mona o tond dre an traoñ*). O ! deuit buan, itron markizez, eur helou mad am-eus da lavared deoh.

**Mona**

Din-me ?

**Lom**

Ar poltred-ze euz an aotrou markiz, ho-poa kemend a hoant da gaoud ? Hep klask tro ha didro, am-eus goulennet digand an aotrou kont ha c'hoantaad a ree e werza ?

**Mona**

A zoñez-te ?

**Lom**

Kerkent eo eet en eur gounnar !

**Mona**

A ! te 'wel !

**Lom**

Ra vezin d'an diaoul ! emezañ. Evid piou e kemerer ahanon ? evid eur gwrier arhant ? evid eur raz gouez ! Ar poltred-ze a ginnigan a-greiz kalon d'an itron markizez !

**Mona**

A ! lavaret en-deus an dra-ze ?

**Lom**

Brao eo evitañ, n'eo ket 'ta ?

**Mona**

Brao a-walh !

**Lom**

N'eo ket gwall droug an den-ze ! Mez taer eo, itron markizez, hag eun tamm rog gand an dud izel, evel ma'z eo ar Frañsizien a renk uhel...

**Mona**

Ro peoh ! setu hañ !

## **Kevrenn X**

**An heveleb re, Alan**

**Alan**

*(o tond dre an tu dehou, eur paper gantañ en e zorn heb gweled Mona na Lom)*

Eur skrid am-eus kavet a-dreg poltred ar Markiz ! Na souez eo ! (*Poursu a ra da lenn, pa wel an daou all*). A ! (*kuzad a ra buan e baper*).

**Mona**

*(o vond a-raog)*

Lom a deu da rei din da anaoud, aotrou kont, ar zoñj ho-peus bet ennon hag e pedan ahanoh da zegemer va anaoudegez vad !

**Alan**

*(laouen)*

Gortozit, itron... Ar zoñj-ze n'eo ket marteze heb esperañs da gaoud eun digoll. Ma 'mije d'am zro eur zervij da houlen diganeoh !

**Mona**

Eur zervij ? Mez ma 'ma em galloud ?

**Alan**

En ho kalloud, sur ! Evel ma weloh, mar kirit va zelaou eun nebeud amzer.

**Mona**

A galon vad ! Lez ahanom, Lom goz !

**Lom**

Mond a ran ! *(en eur vond)*. Sell ! sell ! Petra a hallfe beza da lavared eta ! *(mond a ra dre an traoñ)*.

## **Kevrenn XI**

**Mona, Alan**

**Mona**

Ho selaou a ran, aotrou !

**Alan**

*(en eur stoui e benn)*

Mil bennoz ! Mez plijet ahanoh kemered ar boan da azeza. *(Astenn a ra eur gador-vreh)*. An dra-ze a roy din amzer da renka va geriou evel soudarded en eun emgann.

**Mona**

*(En eur hoarzin)*

Marteze... Mez ho tigarez ! c'hoaz eur hras all ! N'am lezit ket evel-se, rag a-raog kregi e refoh d'an enebour tehed.

**Mon**

*(o trei he fenn)*

Re droet emañ evid ho mad hoh-unan, hag evid ho kas war-raog !

**Alan**

*(laouen)*

Va has war-raog ? Setu aze eur gomz a ro din nerz kalon hag ez am da weled ma vezin bremaig war gresk.

**Mona**



Komzit, aotrou !

**Alan**

*(o poursu)*

Mad, itron ! Me a anzavo ouzoh e kavan eun dra dreist-ordinal beza perhenn... N'on ket bet boazet euz kement-se !

**Mon**

*(o vousc'hoazrin)*

Eur voazamant eo hag a zo êz da gemered !

**Alan**

Nann, pas kement ha ma soñjit ! Nann, war va enor. N'en em gavan ket em flas er vro-mañ, e-leh ma komz ouzin eur mevel evel eun denjentil. C'hwi hoh-unan, itron, hoh-eus an êr da gared muioh eged ho puhez, ar yez-se am-eus bet desket gwechall e skolaj Sant-Charlez e Sant-Brieg. Mez lavared a rankit n'eo ket greet evid on amzer-ni. Me n'on ket em êz amañ, ha ma karje itron va moereb beza mad evidon, eh asantfe beza perhennez d'an maner-mañ. E houarn a rafe ker mad ! Gwir ! servij a rentfe en eur rei din ar pevar mil lur leve ah on karget da rei dezi, hag o telher ar peurrest. Eun dra bennag a lavar din e rankit chom amañ ! Evidon, me a guitao laouen ha buan, evel m'on degouezet !

**Mona**

Ar pezh a ginnigit din aze, n'eo ket mad, aotrou kont. Tenna a rit diganen ar joa am-oa bremaig, oh ober din kaoud ar boan d'ho refus.

**Alan**

Dinah a rit !

**Mona**

*(seh)*

Dinah a ran !

**Alan**

Mez perag ? Livirit peseurt abeg, me ho ped !

**Mona**

Perag, aotrou ? Abalamour oh mestr war gement tra 'zo amañ, abalamour oh ar gwir her, hag an abeg a zo dreist ar re all c'hoaz, abalamour oh eun denjentil euz Breiz. E-leh mond en eul leh all, 'vel eun divroad, e tleit rei d'ar re 'zo izelloh evidoh ar skwer zakr euz ar garantez evid ar vro m'oh ganet enni, evid ar brezoneg, evid gizioh on tadou-koz. Erfin abalamour herez Landelo na zle ket chom heb eur penn, hag ez eo dever eun denjentil hirio pa ren ar Bobl, beza eur rener ma n'eo mui eur mestr ! Ouspenn-ze, na boursuit mui, aotrou, ober a rafeh poan din, greet am-eus va zoñj !

**Alan**

*(buan)*

Neuze 'fell deoh kuitaad ! Ne andurin ket kement-se !

**Mona**

Aotrou kont !

**Alan**

Ha me 'zo kaoz, ma ne ouzon ken petra on, abaoe m'am-eus ho kwelet nag e peleh  
emaon, ha me 'zo kaoz, mar ho-peus abaoe ma 'maon amañ roet din da anaoud evid eun  
amzer da zond eun evurusted e peoh hag en dever ha ne anavezen ket !

**Mona**

*(tenerraet)*

Aotrou !

**Alan**

*(tan en e zaoulagad)*

Ar gwel ahanoh... ho yez a ra d'am halon tridal gand ar vrasa joa... Me 'gar bremañ ar  
maner koz-mañ, ar Vretoned-mañ, ar zoñj euz va yontr ! Gweled a ran pegen talvouduz eo  
evidon gouzoud a-walh a vrezonég, evid lavared deoh, er yez-se a garit, ar pezh o-deus  
lavaret va zadou d'am mammou-koz a-hed ar hantvejou. « Ho kared a ran », ha karoud a  
rafen implij va buhez evidoh. *(O kemered he daouarn)*. Petra 'zo da ober evid plijoud  
deoh ?

**Mona**

*(o tenna he daouarn)*

Ho truez ! Grit peoh ! Na hellom ket en em gared !

## **Kevrenn XII**

**An heveleb re, Lom**

**Lom**

*(o tond gand e letern).*

Itron, ar paotr-saout a zo aze hag am zikouro da lakaad ar poltred 'barz an tilburi<sup>3</sup>. Ha  
neuze, tud ar barrez a zo er porz, deuet evid kimiadi ouzoh.

**Mona**

Ya ! ya ! bremañ ! tuchantig ! mond a ran !

**Alan**

Kenavoioù<sup>4</sup> atao ! kenavoioù ! Ha pa zoñjan eo me hag a deu d'ho laerez ha d'ho kas er-  
mêz !

**Mona**

An douarou a zo deoh, aotrou, ya ; deoh int...

**Alan**

Mez n'am-eus ket ezomm euz ho maner... N'ez in morse da chom ennañ...

**Mona**

Perag ho-peus goulennet an noter, neuze ?

---

<sup>3</sup> tilburi : ?

<sup>4</sup> Kenavoioù : liester "kenavo"

**Lom**

Evid e werza an uhella priz.

**Alan**

E werza ! Gwerza an ti-ze a gareh ! hag e lakeet da veza bravoh... c'hwi, al limaj<sup>5</sup> dudiuz euz ar Vreiz-Izel-ze, atao yaouank hag atao nevez, a deu en eun taol din en em ziskouez d'am daoulagad ! Gwelom, itron, ha ne fell ket deoh asanti da gemered an doare da chom amañ, an hini ho-peus hepken !

**Mona**

Red eo lezel an traou evel m'emaint, aotrou !

**Alan**

Ho ker diweza eo ?

**Mona**

Ya...

**Alan**

Mad 'ta ! (*o cheñch ali*). Mez ar poltred hag a zo plijet ganeoh degemeret, lezit ahanon d'her hinnig deoh va-unan.

**Mona**

Perag, aotrou ?

**Alan**

C'hoantaad a ran kalz kement-se !

**Mona**

A galon vad !

**Alan**

Distrei a ran, itron ! (*outañ e-unan*). Amañ eo e ranker sabrenna ar yontr ! Kamm-digannom ! Adsinom ! (*antreal a ra buan e kambr an daolenn*).

## **Kevrenn XIII**

**Lom, Mona**

**Lom**

Me 'gred e ra eun taol fall bennag.

**Mona**

A ! kredi a ran am-eus greet poan dezañ ; bez' ez eo leal ha kaloneg !

**Lom**

---

<sup>5</sup> limaj : skeudenn.

Evid an dra-ze, serten ! ne vijer ket pell, a welit, itron markizez (*en eur selled a-zindan*) evid ober eur Breizad mad anezañ, evel ma oa an aotrou markiz. Doue en-devezo e ene...

## **Kevrenn XIV**

**An heveleb re, Alan, Perig**

**Alan**

*(O tond adarre, en e raog Perig, ar paotr-saout a zoug ar poltred goloet gand tul glaz. Da Berig) :*

« Alo, kerz war-eeun, kovig yod... Diwall mad d'ober droug da netra... (*ar paotr a vrall, an tul 'zo direnket, eur paper a gouez deuz ar stern*).

**Lom**

*(o tastum anezañ)*

Sell, eur skrid eo !

**Alan**

*(d'ar paotrig)*

Lak an daolenn ouz ar voger !

**Perig**

N'on ket kouezet, aotrou... Ma vije bet Tual ar jardiner en-dije brallet evel-se, evid sur en-dije torret eun dra bennag, peogwir eo hir evel tour ar Hreisker ! (*an oll a hoarz*).

**Lom**

*(o lakaad e lunedou war e fri)*

Mez setu amañ an testamant...

**Alan**

Peseurt testamant ?

**Lom**

An testamant, a lavaran deoh, an testamant n'oa ket gallet ma mestr sina, abalamour ma oa seizet gand ar paralizi (*tenna 'ra e lunedou*).

**Mona**

An testamant ?

**Alan**

Imposubl eo !

**Mona**

*(en eur e gemered hag o lenn)*

« Me, Alan-Herve-Tugdual ar Waster, markiz a Landelo, bet letanant a vag-vrezel, komandant ar vobiled euz Kerne, yah a gorv ha a spered, a zisklêria :

Distruj a ran dre ar skrid-mañ, an testamant a zo etre daouarn an aotrou Lagadeg, noter e Lanrien, dre an hini<sup>6</sup> eh iñtituen va niz Alan ar Waster, kont a Landelo, deuz an eil skourr euz va zad, hag em goude, mestr a ano hag a armou, va heritour evid maner Landelo.

Lakaad a ran an itron Mona, va fried hervez al lezenn hag an Iliz, en e leh ha plas evel heritourez d'am oll draou. »

**Mona**

*(o chom heb lenn)*

An dra-ze eo just ar pezh en-doa skrivet war ar paper am-boea taolet en tan...

**Lom**

*(goude beza lakaet, a-nevez, e lunedou hag en eur zelled dreist skoaz e vestrez).*

Ya ! mez n'eo ket toud...

**Mona**

*(o terhel da lenn)*

« A zisklêrian ouspenn-ze, ar skrid-mañ na dalvezo da netra, mar deu Alan a Landelo, va niz, eur wech e goñje soudard echu gantañ, d'en em añgaji dre skrid, da genta da chom er maner, ha d'an eil, da gendelher ma oberou evid diwall ar brezoneg, ar skoliou hag al lehiou-c'hoari evid ar zul, savet ganin er barrez-mañ a Lanrien. An divizou-ze o veza respetet, an eil testamant a vo nul, hag an testatour a gont war enor an denjentil e niz, evid rei e leve d'an itron Mona hag e bañsion da Willom Laz-Bleiz.

Greet em hastell a Landelo, parrez Lanrien, a eil a viz Even mil nao hant ha tri. »

**Lom**

*(laouen)*

Hag ez eo Doue posubl ?

**Alan**

Petar lavarit aze ? Sinet ?

**Mona**

Mez, n'eo ket posubl peogwir am-oa e daolet en tan...

**Lom**

Mez me 'm-eus e dennet euz an tan, me... Hag eo sinet. Benniget e vezo an oll Zent a Vreiz hag an aotrou Sant-Weltaz, ar henta anezo.

**Mona**

Erfin ne gomprenan netra !

**Lom**

Me 'zo 'vond da isplika kement-se deoh.

**Alan**

Ya ! ya ! isplik 'ta neuze !

**Lom**

---

<sup>6</sup> an hini : "behini" er skrid orin.

Gouzoud a rit penaoz ar re a anver ar Re Varo, n'int ket maro penn-da-benn evid ar wir gristenien. An Aotrou Doue a lez atao d'an dud vad evel ar Markiz, dond da ober o finijenn el lehiou o-deus karet. Neuze am-eus en em lavaret evel-henn : Ma lakaan bemdez da zeg eur dioh an noz, ar paper a-dreñv an daolenn, e vezo sur sinet e-pad eurveziou<sup>7</sup> ar Re Varo, rag red eo d'ar Re Varo peurechui ar pezh n'o-doa ket gellet ober war an douar. Evel-se ar paper 'zo bet sinet, netra ne vank dezañ !

**Alan**

Gwir eo ! Anaoud a ran mad sinatur va yontr ! eur skilfou kamm-digamm evel eul luhedenn. (*ober a ra ar jestr*).

**Mona**

(*o selled outañ en e fas*)

Ya, n'eo ket 'ta, aotrou ?

**Alan**

(*nehet*)

Ar gwir 'zo ganeoh ! (*da Lom*) : kas anezañ buan d'an noter...

**Mona**

Eur pennad amzer, aotrou. D'am zro, me 'zo prest da ranna ganeoh.

**Alan**

D'am zro, ivez, da lavared : nann ! C'hwi eo ar wir bennherez...

**Mona**

Bez' ez eus kondisionou ha ne gomzit ket anezo, hag ouspenn, ar zinatur-ze...

**Alan**

Hini va yontr eo...

**Mona**

Pe hini eun all bennag marteze...

**Alan**

(*pront*)

Diwallit, itron. Me 'mije greet eur paper faoz, me, Landelo... A ! setu aze eun tamall hag a hallfe lakaad eur zoudard kaloneg da veza diskaret deuz e garg dirag an oll...

**Mona**

Nann... nann..., aotrou. (*kemered a ra an testamant hag hen freuz*).

**Lom**

(*spontet*)

O !...

**Alan**

Petra 'rit ?

---

<sup>7</sup> eurveziou : euriou, er skrid orin.

**Mona**

Va dever, netra ken... Mez mar fell din nompas dizoloi ar mister... burzuduz-mañ, eo deoh d'ho tro da zegemer va hondisionou...

**Alan**

Ya, va moereb...

**Mona**

(gand teneridigez)

Bremañ p'eo distrujet an testamant, am-eus c'hoant e talfeh dre garantez evidon, ar hondisionou euz an eil skrid, eur wech ho servij soudard echu.

**Alan**

Mona, ha kaoud a hellit douetañs ? (*kemered a ra he dorn*). Va fried...

**Lom**

Komz ar barz 'zo deuet da veza gwir. Douar Breiz en-deus adkemeret e vab, abalamour 'oa sonet an eur, ha ma oa c'hoant ar Re Varo.

(*Al lien a zsikenn*)

